

## LOCH AR C'HAVR

### La cabane de la chèvre

<p>E-barzh « Loch ar c'havr » pa oan degouezhet  Ar chistr war an daol ne vanke ket  E-barzh ar gwele bihan e-kichen an tan  Ar c'havr vihan a oa hec'h-unan</p> <p>Hi a lavar din ken brav ha tra  Da vont ganti evit en em dommañ  Ha me a oa ken sot hag hi  Teurel va botoù, mont ganti</p> <p>Antronoz vintin pa oan savet  Ma botoù-koad am boa kollet  Ho potoù-koad a zo e-barzh ar vojenn  <span style="padding-left: 2em;">kraoñ (-kelvez)</span>  Hag a-benn ma vo avel, int a gouezho en traoñ</p> <p>Ma botoù-koad a oa e-barzh ar vojenn  <span style="padding-left: 2em;">kraoñ (-kelvez)</span>  Gant ur fourrad, int a zo kouezhet en traoñ  Ma botoù-koad a zo war al leur-foenn  Setu echu ma c'hanaouenn</p>	<p><i>Quand je suis arrivé à « La cabane de la chèvre »  Le cidre ne manquait pas sur la table  Dans le petit lit près du feu  La petite chèvre était toute seule</i></p> <p><i>Elle me dit tout à trac  D'aller avec elle me réchauffer  Et moi, qui étais aussi fou qu'elle  J'enlève mes chaussures, je vais la rejoindre</i></p> <p><i>Le lendemain matin, quand je me suis levé  J'avais perdu mes sabots  Vos sabots sont dans la touffe de noisetier  Et quand il y aura du vent, ils tomberont</i></p> <p><i>Mes sabots étaient dans la touffe de noisetier  Avec une bourrasque, ils sont tombés  Mes sabots sont sur l'aire au foïn  Voilà ma chanson terminée</i></p>
--	--